



CHANSON

AN TEIR VESTRES COANT.

Couplat ar Goas.

Tostaït ol , yeouanqis deus an assambleou ;
Deut da glevet an divis a brodu va c'homzou ,
A dre ma vezint lennet ober intension
Vit na veet qet dallet en laç an draïson.
Men gommansez yeouanqic bale var e roedou ,
Ag a varche manific eb luia ya boutou ,
Abaoue ar seignuri e deus va amaret
Eb alloud james teri liam e c'hrueldet.
Evit commans da guenta , er ger a Vontroules ,
D'an oat deus a seitec vla e choasis eur vestres ,
Em poes deus va fuissans qer qoant ag a varche
Ne scoisen qet e c'havans ar c'harant a c'heuïlle.
Scrifet ganemp eur garten deus ar re joaussa
A ramplisset eur frajen deus an oat on deoa ,
Dre or c'homzou gachedet en un domin care
Vid e euil humbl a parfet eb sanch a volonte.
Mes va mestres a sorti da fond goelet Leon
Ag etablissa enni en ent var ran galon ,
Neuze e heuïllen alies nomb a fumeleset ,
Ag em bije mil vestres e oan bepret jenet.
A bers eur pennat goude , e tremen lins ar vro
Rancountr eun al adare en eun andret va zro ,
Peini e surpasse en e galantiri
A gomans eun amitie deus ar gaera ganti.
Pa oa de on union en assurans merqet ,
Gand serurion diou galon e chaden alc'hoet
Ma qoites a demei er ger a Orlean ,
Men doug eur bec'h melconi er poent-se va unan.
Prest e trois ar retour var va c'his ac'hane
A comans ober conqour gant eur vestres neve ,
Pini a laqa contant va deiou irvoudus
A va c'halon languissant deus rentet joaius.
Quenta ma e remerqis e oa eur zul vintin ,
E passeal an Ilis em beret Plounerin ,
M'am boa eun desir fervant da vont de c'hondui ,
Mes e depeing qer galant a deu d'am retardi.
Saludi a ran goude talanchou e sclerder
E pourmen an assamble em pardon sant Ener ,
Pa ranconten e degach er blienen e varcha
Al liou goen var va bisach a deuas da ruia.

Salud , fumelen charmant , evid ar vech genta ;
Mar conven do santimant ne qet an divea.
En o reget me c'houlen var droad ar fleurdilis
Formi on deou eur rozen emesq ar yeouanqis.

Couplat ar Plac'h.

Ag en leal , den yeouanq , dre otouster barfet
Gant eun deseign qer divang evel ma leveret
No po james eur reform e c'havans va bete
Arioud a ra o conform o comzou a va re.

Couplat ar Goas.

Assa eta , va mestres , avansomp or passiou
A destinomp un deves da regli or c'homzou
Pini var or promesse ma na vec'h infidel
A raio demp un alhoe ag a vo solanel.

Couplat ar Plac'h.

Da formi , va servijer , eur sin a amitie
Ag assuri gand amser de or solenite
Eur merq a reprobite a refomp assambles
De foar anec'h mis ere var have Montroules.

Couplat ar Goas.

Salud dec'h , plac'h yeouane a c'hoi am recefe
Da vont do condui eun dro en assemble ?
Ma ve o santimant engal deus va ini ,
Em be contantament e tont do frecanti.

Couplat ar Plac'h.

Ya , emey , o comzou a gontant va speret ,
Mar bec'h just d'o dere'hel evel ma prometet ,
Evid deus va feurs bigen faut ne vo
Ag ar c'henta manq e c'hoi er c'homanzo.

Couplat ar Goas.

Neuse eta , va mestres , tosteomp dar ger
Ag anvomp eun deves da choas merq a sclerder
Deus or c'hontrat civil ma ne vanqet qet
Solanite or famill a raï demp eur banqet.

Couplat ar Plac'h.

Evit posi eur sin var or promesseou
A goud pe sort poent contradi or veuiou
Pea refomp eur merq da broui qemen-se
Nor bo qet a zoetans an eil deus eguile.

Couplat ar Goas.

Red e areti breman on dudiou a joa ,
Qiniadomp en qemend-man , fin an de a dosta.
Adieu eta , va mestres , en esperanq parfet
Ma parlantimp assambles er plas on deus choaset.

Couplat ar Plac'h.

Mar bec'h evel don solit , e mei , va servijer.
Nin en em rento acquit er plas-se ep difer
Gant ar memeus sclerijen d'an eur on deus fixet
Evel eur gereleouen arog an de zavet.

Ar plac'h a rent e dever d'ar poent a oa laqet
 A gortos e servijer eun neubet e deus gret
 Qemer a ra liberte pa ne oa nemet,
 Ol fermder e c'harante a deu da ranversi.

Da ugent minut espen en em rentet ar goas ;
 Na ne vel e fumelen d'e galon e c'ha ar glas,
 Querquent e zeves natal a vailleur e speret
 Gand un abit infinal e mesq ar gabtivet.

Remerq.

Goude vel eur preuveunis o deou var o deoulin,
 Deus balustrou an Ilis, er ger a Oerl'sqin,
 Int en em aparisset en eun trionf ar c'hloar
 Met ar galon so cuset dindan bec'h ar glac'har.

Couplat ar Goas.

De bonjour dec'h, Francisa, exil va c'harante :
 Bed on fotif ar c'henta da boent on amitie,
 Mes ma roit ordrenans en deiou da zonet,
 Men raparo assurans elec'h ma on manqet.

Couplat ar Plac'h.

Actif o termen racquit so malin emei,
 En articl ma parlantit men deu d'en areti :
 Ar chaden ar gonfians entreomp so toret,
 A destinou or prudans dre se so finisset.

Couplat ar Goas.

Evit eur vech on manqet ag o pije egar ;
 Ma vijec'h qen glac'haret c'hui roje din victoar,
 Pa man dre o pouariou va speret er c'holler,
 Exposet indan branqou goeen an disesper.

Couplat ar Plac'h.

Clevet emeus discleria vaqansou o tesir
 A bosit d'am godissa, credin a ran er goir
 Ma vije ferm em faveur o temarc'h angajet
 James rolaj or bonheur no pije traisset.

Couplat ar Goas.

Lesit ar juj temerer teot escummunugen
 Da c'hortos pea amzer e fos trajidien ;
 Men c'houlen, mar permett, cartier d'on amitie,
 En opteni a ellit var rol ar virione.

Couplat ar Plac'h.

Va steudi a retardit, o sin ne qet assur
 Or mandat pa parlantit a effac e scritur,
 A pa e d'am bolante ar yeouanqis goirion
 Na seuit min va bete dre fent an draison.

Ari e an nos, finissa so ret ;
 Qenavo, va mestres, an devez destinet
 Ariout a refomp er plas on deus anvet
 Nemet un dra vras a deufe da viret.

Mar bec'h ferm evel don , va servijer , emei ,
 Nin a vo abred eb dont da ziferi ,
 Abers va areti e ve red eur maleur

Qent ampej na vefen er plas-se dan eur.
 Ar plac'h en em gaves er plac' abret mad ;

Ag ar goas so dale'het eun tam re divead.
 Chom a ra d'e c'hortos : treitour e , emei ,
 Bigen a lavares ne deu d'am frecanti.

Er plas-se glac'haret an den-man a lavar
 Ne meus qet a voneur gant sort var an douar ;
 Robe ar gabtivetet va maleuriou genta ,
 Ma ne ven sicouret non qet vid e fresa.

Chom a ra an deou man eb en em dalempret ,
 Joaius en aparans ag ar galon jenet ;
 Goude , en Goerlesqin int en em remerqet
 Qer just a pa vijent o deou en em glevet.

De bonjour , fumelen ; credit e meus glac'har :
 Manqet on da genta evel un den barbar ,
 Met heuillomp an demarch on doa commanset ,
 Men rai merqou neve evel ma leverfet.

Da ober promese c'hui peus comzou mechant ,
 En creis an draison en em gavit contant
 Echu e an amser or boa d'en em garet ,
 Ne meus qen a fians da zongen dec'h respet.

Vid eur faut a meus a d'e ober forcet ,
 Ma raje dec'h dies evel ma leveret ,
 C'houi c'houlenje goud facil ar virione ,
 Ne meus nemet tourmant pa ne red gemen-se.

Troubla va yaouanquis a ret dre o comzou.
 Ne meus qet da gredi var o promesseou ,
 C'hui a rafe din c'hoas evel o peus gret ,
 Va ide a so guir ne deut qet dam guelec.

Brema me lavaro anvou va zeir vestres ,
 Neus qet a zisenor deus va c'hompagnunes
 Ar guenta Angel Vigne , Marie-Françoise Volantin ,
 An deir goudeze Franceza Salavingn.

Eun amenuser yaouancq , e reded ar vroyou
 Bed eur pennat e chom en bourg Lanneanou
 Pa zino e zoniou pe neus fors petra ,
 E Olier MERCER à renqo da scrifa.

FIN.